



Domani Kerampuilh e Karaez-Plougêr





Fasadenn ar c'hastell © FlyHD

Pennad-Ńtur

Ullec'h pouezus-kaer eo domani Kerampuilh evit glad ha buhez ar c'hornad hag ar rannvro. Emañ war-nes boulec'hañ ur pennad nevez eus e istor goude bezañ bet meur a vuhez.

Hiziv an deiz eo Rannvro Breizh a zo perc'henn war al lec'h. Lakaat a ra arc'hant evit delc'her da ziorren an domani, dezhañ da vezañ ul lec'h anavezet e Kreiz-Breizh, war dachenn an touristerezh hag ar sevenadur dreist-holl. Tost emañ d'un toullad aveadurioù all evit ar sport pe ar sevenadur, ha da lec'hioù naturel evel ar ganoleus Naoned da Vrest ; rak-se e c'haller ober traoù all a bep seurt, en ur zelc'her liammoù gant ar vro.



© EP Images

Krouet ez eus bet salioù ha lec'hioù nevez e diabarzh ar c'hastell, d'an domani da vezañ implijet e doareoù nevez : ur salbrezegenniñ, lec'hioù evit labourat ha kejañ gant an dud.

Evit echuiñ, gant Ofis publik ar brezhoneg staliet e diabarzh ar c'hastell, da-heul al lise Diwan a zo war an domani pell zo, e teuy Kerampuilh da vezañ, e-kreizig-kreiz hor bro, un arouez eus lañs ar brezhoneg hag eus an oberoù evit difenn pinvidigezh yezhel Breizh.

Loïg Chesnais-Girard
Prezidant Rannvro Breizh

Un testeni eus an istor lec'hel ha rannvroel

Meur a gant vloaz zo ez eo domani Kerampuilh ul lec'h pouezus-kaer e maeziou hag en istor Kreiz-Breizh.

Kastell Kerampuilh a voe perc'hennet gant ar familh De Saisy. Al lignez kastellidi-se a lakaas da gentañ sevel ur maner kentañ, 400 m pelloc'h er mervent d'ar c'hastell, hag a voe ti-anez prokolor lez-varn Karaez er 16^{vet} kantved, ha da c'houde hini Jili Gerampuilh, chaloni iliz-skolaj Sant Tremeur. Ne chom netra eus ar savadur kentañ-se en deiz hiziv. An eil kastell a voe savet e 1760 gant Charlez-Roperzh de Saisy, aotrou kont Kerampuilh ha kuzulier e Parlamant Breizh. An ti-anez-se, gant un tres ingal, un talbenn kornôg 40 m a hed ha div gazel valirek un tamm, zo daou estaj ennañ ha lusk a vez roet d'an doenn gant un heulep lukanoù. Un hevelep doare da aozañ al lec'hioù a laka soñjal


e doare tiez-anez parlamantidi Breizh, anezho arouezioù splann eus pinvidigezh uhelidi ar broviñs. En em astenn a ra ar savadur war 870 m² pe war-dro hag an domani zo dindanañ war-dro tregont hektar a zouaroù ha pourpeziou. Ar re-se – marchosioù, ul lab-karr, ul lojeiz, hag ivez ur chapel vihan – a voe savet d'ar memes koulz. Ar savadur, hag a oa bet perc'hennet gant ar memes familh betek an Dispac'h Bras, a voe lamet diganto neuze abalamour ma oa feal tud Kerampuilh da roue Frañs, ha gwerzhzet e voe evel mad broadel. Da vare ar Restaorasion e oa bet roet en-dro d'an tiegezh a adkavas ul lodenn eus e wirioù hag e vadoù.

Kastell Kerampuilh zo un ti-anez arouezel ma oa parlamantidi Breizh o chom en 18^{vet} kantved.

Mammenn : Dielloù-departamant Penn-ar-Bed - 2.FI.2464



BRETAGNE
Finistère — 1150 - CARHAIX, Château de Kerampuilh




Mammenn : Kreizenn Igenezouriezh hag istor ar Poc'hêr

UL LEC'HIENN, MEUR A VUHEZ

An domani, lakaet e gwerzh e 1833, a voe adprenet gant Emmanuel Joseph, kont Kerampuilh. Henezh, ha n'en doa ket c'hoant moarvat da welet ar c'hastell o kuitaat an tiegezh, a renevezas ar savadur ha kas a reas al labour-douar war-raok war e zomani. Taol-degouezh pe kendalc'h an istor? Azoañ a reas neuze ur gouel ar "pemp kant arar" evit difraostañ e lanneier. Gant an tiegezh Kerampuilh e voe dilezet ar c'hastell e 1939, war an diviz ma talvezfe da ospital ar re gozh. Evel-se e oa bet kont e-pad meur a vloaz, dindan renerezh leanezed.

A-hed e istor hag e dreuzfurmadurioù e oa bet graet labourioù adaozañ bras er savadur ha kollet en doa e holl ziabarzhoù, e viñs-doubl koad ec'hon gant gwerzhidoù ha dorioù. Ar c'hastell, enskrivet e renabl ar Monumantoù istorel e 1965 abalamour d'e dalbenn hag e doennoù, a voe prenet gant Kêr Garaez e 1999, ha da c'houde e voe adwerzhet e 2010 en ur sammad a 1,5 milion a euroioù d'ar Rannvro a labour hiziv evit reiñ buhez dezhañ en-dro.



© Rannvro Breizh

Deiziadoù bras domani Kerampuilh

16^{vet} KANTVED

Ur maner kozh a oa el lec'h m'emañ domani Kerampuilh

1760

Savet e voe kastell a vremañ Kerampuilh gant Charlez-Roperzh de Saisy

DISPAC'H BRAS

Gwerzhet e voe ar c'hastell evel mad broadel

RESTAORASION

Kastell rentet d'an tiegezh Kerampuilh

1833

Lakaet e voe ar c'hastell e gwerzh hag adprenet e voe gant Emmanuel Joseph, kont Kerampuilh

1939

Labourioù adaozañ bras a voe graet e diabarzh ar c'hastell pa voe treuz-furmet en un ospital evit ar re gozh.

1965

Talbenn ha toennoù ar c'hastell enskrivet e renabl ar Monumantoù istorel.

1987

Adkempennet e voe toennoù ar chapel hag al lab-karr da-heul an distrujoù graet gant barr-amzer miz Here (gwez en tu all da gant vloaz diskaret)

1999

Prenet gant Kêr Garaez

2010

Prenet gant ar Rannvro

2011

Labourioù evit startaat framm toenn ar c'hastell hag evit bezañ diouzh ar reolennoù yec'hedel (diblomañ ha dizamiantiñ, tretadurioù a-enep ar merul,...)

KERAMPUILH TRES AN DOMANI

E domani a vremañ Kerampuilh, er gevred da Garaez, ez eus un dachennad douar ouzhpenn 60 000 m². Warni ez eus ur c'hastell ha pourpezioù a bep seurt (marchosi, ti an diwaller, kludeg, chapel), hag ivez savadurioù all nevesoc'h.



1



Ar c'hastell, savet e 1760

Pourpeziou ar c'hastell

2



Lojeiz kozh an diwaller (bet savet er memes mare ha hini ar c'hastell)

3



Ar gludeg kozh

4



An ti-feurm kozh, ennañ ar marchosioù

5



Ar chapel, savet e 1840 gant kont Kerampuilh

6



Un hollad savadurioù hag a zo ennañ salioù kelenn al lise Diwan, hag ivez ur greizenn herberc'hiañ ha predañ

7



Salioù an SREST (Skipailh-red a skoazell deknikel) eus Rannvro Breizh

8



E-kichen an domani emañ ti kevredigezh an Erer Kozh.

Ar vuhez e domani Kerampuilh

Meur a vloavezh zo eo an domani ec'hon-se ur greizenn obererezhioù a bouez e buhez Karaez. Ennañ e vez roet bod da frammoù a bep seurt a zo o kenvevañ hag o kenloañ al lec'h.

AL LISE DIWAN

El lise divyezhek galleg/brezhoneg-se e vez degemeret tost da 400 lisead bep bloaz. Ennañ ez eus 5 savadur, gant ur c'houkva rannet e 2 savadur, hag ur preti-skol evit

al liseadezed hag al liseidi pa vez skol. Daou savadur-all zo gouestlet d'ar c'helenn.

Evit gouzout hiroc'h : lisediwankaraez.bzh

AR GREIZENN HERBERC'HIAÑ

Pa ne vez ket skol e vez digor an ti-se evit degemer strolladoù, gant meur a servij (nozvezhioù, predoù evit ar strolladoù, feurmiñ salioù...). Gant 116 kambr ma c'haller kinnig betek 330 gwele eo bras barregezh degemer al lec'hienn. Degemeret e vez kevredigezhioù ha kluboù

sport ha sevenadurel, dreist-holl, er greizenn herberc'hiañ ha teknikourien ha teknikourezed Gouel an Erer Kozh a vez lojet enni bep bloaz.

Evit gouzout hiroc'h :

kerampuilh@ailes29.org

02 98 99 36 97

SKIPAILH-RED A SKOAZELL DEKNIKEL (SREST) RANVRO BREIZH

Gwazourien ha gwazourezed SREST ar c'hornad, lojet en un savadur savet nevesoc'h zo, zo karget dreist-holl da zerc'hel staliadurioù teknikel

liseoù ar Rannvro e stad vat a-hed ar bloaz. Dre m'emaint tost dezho e c'hallont ober buan war o zro ma chom sac'het tra pe dra.

AR GEVREDIGEZH AILES, HAG A VER DOMANI KERAMPUILH

En ur reneveziñ ar c'hastell, ar Rannvro he deus c'hoant da ober eus Kerampuilh un avedur troet war ar sevenadur hag an touristerezh hag a vent sokial anavezet evel ul lec'h dave e Kreiz-Breizh. Evit ar pal-se eo bet fiziet merezh al lec'hienn er gevredigezh Ailes (Kevredigezh Hirwazh evit al lojañ, an implij hag ar c'hengred) gant ar Rannvro e 2011, e stumm un dileurierezh servij publik abaoe 2019.

Ailes, ur gevelerez ha ne c'haller ket ober hepti war dachenn an

terkañ tiriadel, a laka he mailhoni da dalvezout war dachenoù a bep seurt : annez ar re yaouank hag etre remziadoù, kenemprañ, dilojañ kempret, pretierezh ha touristerezh sokial...

Gant ar gevredigezh e vez meret bremañ evit kont ar Rannvro an degemer touristel e-barzh ar greizenn herberc'hiañ, an oberezh e Kastell Kerampuilh a-nevez zo (1añ a viz Gwengolo 2021), hag ivez reneveziñ ha merañ ti an diwaller a-benn nebeut.

Evit gouzout hiroc'h : www.ailes.infn.fr

AMAÑ E VEZ AN ERER KOZH O VIRVIÑ

Pa reer anv eus « Kerampuilh » e reer anv eus an « Erer Kozh » evel-just ! Bep bloaz, e miz Gouere, e vev an domani diouzh lusk ar festival mojennel-se. Gant ar festival, brudet evit e zibab hag e endro madelezhus, e vez sachet ouzhpenn 250 000 a dud bep bloaz hag

e vez graet kalz evit brud ha dedenusted Kreiz-Breizh.

E Kastell Kerampuilh, goude labourioù reneveziñ, e vez kinniget lec'h d'ar festival, dreist-holl evit degemer an arzourien.

Evit gouzout hiroc'h :

www.vieillescharrues.asso.fr



Ur programm bras a labourioù evit implijoù nevez

ADKEMPENN AR C'HASTELL

Rannvro Breizh, perc'henn war domani Kerampuilh, Rannvro Breizh, perc'henn war domani Kerampuilh, zo kroget gant un oberiadenn vras evit reneveziñ ar c'hastell. Pal al labourioù eo krouiñ egorennoù nevez ha reiñ ul lañs nevez d'al lec'h-se, dreist-holl evit ober anezhañ kreizenn arouezus ar brezhoneg e Kreiz-Breizh.

Goude ur programm labourioù kentañ evit lakaat ar savadur e surentez e 2011, e oa bet boulet het gant ar Rannvro ur chanter reneveziñ bras nevez e miz C'hwevrer 2020.

Er c'hastell, adkempennet ha terket war ur c'horread a 870 m², e vez kiniget bremañ meur a egorenn nevez, a c'hall an dud eus an diavaez mont

enno, ha lod anezho a c'hall bezañ miret digant ar gevredigezh Ailes :

- Ur sal-brezegeniñ gant 50 plas
- Un egorenn-labourat voutin.

Aveet eo ar c'hastell gant war-dro tregont post-labour, evit degemer ser-vijoù Ofis publik ar brezhoneg peur-getket, hag ivez gwazourien rannvroel Skourr tiriadel nevez Kreiz-Breizh.

AN OPAB, UR BENVEG E SERVIJ DIORREN AR BREZHONEG

Ofis publik ar brezhoneg (OPAB), hag eñ ar framm kentañ krouet e Frañs evit harpañ ar yezhoù tiriadel, zo ur benveg krouet gant ar strollegezhioù breizhat evit skoazellañ anezho en o folitikerezhioù yezh. Un diazezadur publik a genlabour sevenadurel eo hag ober a ra war-dro kefridioù evit kizidikaat ha brudañ ar brezhoneg, ha sikour a ra da gas

anezhañ war-raok. Gant an OPAB e vez bodet an obererien publik ha prevez peurgetket evit implijout ar brezhoneg evel ur yezh kehentiñ er gennadoù sevenadurel, ekonomikel pe sokial. Ober a ra war-dro kefridioù evezhiañ, erfin, evit gouzout e peseurt stad emañ ar yezh war diriad ar strollegezhioù a zo izili ennañ.

Evit gouzout hiroc'h : www.fr.brezhoneg.bzh

Ur bezañs kreñvaet e-kreiz an tiriad



Gant al labourioù nevez-c'hraet e kastell Kerampuilh e vo gallet degemer implijidi eus ar Rannvro, stag ouzh Skourr tiriadel Kreiz-Breizh a zo e sez e Pondi. Klotañ a ra kement-se gant ar c'hoant kreñv a zo gant ar Rannvro da vezañ tostoc'h d'ar c'heodedourezed, d'ar geodouerien, d'an dilennadezed ha d'an dilennidi ha da respont gwelloc'h da ezhommoù an tiriadoù.

Hiviziken e klask ar Rannvro bezañ gwrizienet gwelloc'h e-barzh ar vro. Krouet he deus evit an dra-se 7 Skourr tiriadel da gernurzhiañ gwelloc'h ar politikerezhioù rannvroel liammet war-eeun ouzh an obererien lec'hel. Pal an doare luskañ nevez-se eo bezañ tostoc'h d'an dud, bezañ komprenet aesoc'h ha bezañ gwelet gwelloc'h, hag aesaat ar c'henlabour a ro lañs da Vreizh. An etrekumunelezhioù (DPKE) zo anezho kevelerien bennañ evit an aozadur nevez-se.

Pep hini eus ar 7 skourr lec'hel-se a glot gant ur strollad etrekumunelezhioù ha ganto e vo gallet respont da ezhommoù lec'hel anavezet ha boutin er c'horn-bro, ken war dachenn an terkererezh, ken war hini an implij, ar fiñvusted pe ar stummerezh... Evit lakaat ar skourroù-se da vevañ en em harp ar Rannvro war lec'hiennoù a oa dija pe war diazezadurioù nevez evel kastell Kerampuilh.



AHELIOÙ BRAS AR CHANTER



Terkadurioù diabarzh ar c'hastell gwelet a-droc'h
© ACS Architectures Chabénès & Scott



Ar sal-brezegenniñ gwelet en diarsell
© ACS Architectures Chabénès & Scott

Krouiñ egorennoù nevez hag
addasparzh diabarzh

Lakaat diouzh ar reoladoù a-fet
monedusted ha tan-gwall

Tretadur termek a-zoare

Adkempenn an doenn hag an
talbennoù, enskrivet e renabl ar
Monumantoù istorel

Lemel ha lakaat dorlec'hioù ha
staloù nevez

Startaat ar frammadur hag
adkrouiñ plañchodoù

Kempenn trowardroioù ar c'hastell
ha krouiñ ul leur-barkañ



Framm orin an doenn, krefivaet ha nevesaet e-pad al labourioù graet e 2011 © Panoramic Bretagne



An oaledoù © Fly HD



Oaled ar gegin gozh (deuet da vezañ ar sal-ervod vras hiziv) © Fly HD

MIROUT ENÉ AR C'HASTELL

Gant programm reneveziñ Kerampuilh e klasker, ouzhpenn kaout ul lec'h klet hag asur, adreiñ e neuz orin d'al lec'h dibar-se. Evit an dra-se eo bet sikouret ar Rannvro gant servijoù arkitektour ar Monumantoù istorel a-hed ar chanter.

Elfennoù savouriezh diabarzh zo bet miret ivez, evel oaledoù zo, en o zouez ar re a zo er sal-ervod vras (ar gegin gozh), ar forn vara pe framm an doenn. Pazennoù kentañ ar skalier a enor, e maen-greun, zo bet adaptet hag adimplijet evit an terkadurioù diavaez.

Ar berzhidi

Mestr an oberiadur : **Rannvro Breizh**

Mestr an oberiadur dileuriet : **SemBreizh**

Mestroniezh al labourioù : **ACS - Arkitektouriezh Chabenès & Scott** (Naoned - 44), arkitektour leuriat kevelet gant **Post** (Naoned - 44), arkitektour glad

Burev studi teknikel liesdiskiblezh : **ajañs Atria** (An Oriant - 56)

Gourc'hemenn, sturianiñ ha kenurzhiañ : **ajañs Atria** (An Oriant - 56)

Ekonomour ar saverezh : **kabined Huet** (Añje - 49)

Burev kontrollañ : **Qualiconsult** (Sant-Gregor - 35) ha Qualiconsult Sécurité (Gwipavaz -29)

Koust

Prenañ ar font : **1,5 milion d'€**

Oberiadenn hollek ar programm nevesaat :


4360 000 € PTB hag en o zouez

- Labourioù : **3 765 000 € PTB**
- Studioù : **595 000 € PTB**

Terkañ ar selaouva (aveadurioù niverel hag arrebeuri) : **100 000 € PTB** (aveadurioù niverel)

Egorennoù-labourat boutin (aveadurioù niverel hag arrebeuri) : **45 000 € PTB**

Deiziadur



TROWARDOIOÙ AR C'HASTELL

Tro a vo ivez e-pad oberiadenn reneveziñ ar c'hastell da adkempenn an endro tost d'ar c'hastell, evit gwellaat ar monedoneoù a-fet aezamant ha surentez peurgetket.

- Aesaat d'an dud nammet mont d'ar chastell en ur grouiñ plasoù parkañ ha hentoù a-ratozh evito ouzh an talbenn reter hag ouzh ar pignon norzh

- Krouiñ un hent a-ratozh evit ar bomberien
- Krouiñ lec'hioù parkañ gwarezet evit ar beloioù
- Terkadur diavaez an ardremez, en ur zoujañ terkadurioù orin al lec'h (tresoù istorel)

Echu : **Gwengolo 2021**

TI AN DIWALLER

Ti kozh an diwaller, hag a zo e norzh al logell, a vo adkempennet a-benn nebeut d'ober 2 lojeiz evit an douristed, ha gouestlet e vo da zegemer baleerien, tud a vicher hag a gemero perzh e seminarioù en

domani... Gant ar gevredigezh Ailes e vez graet war-dro ar chanter-se pa'z eo merourez al lec'h.

Echu : **2022**



Ar raktres da reneveziñ ti an diwaller © Architecture CAO


NEVESAAT AL LISE DIWAN

E Lise Diwan Karaez, lec'hiet war domani Kerampuilh, eo kresket mat an niver a liseidi (150 lisead e 1999, 360 e 2021) ha start eo an traoù pa'z eus diouer a blas ennañ evit ar c'helenn hag evit ar vuhez. Divizet he deus ar Rannvro boulc'hañ ur programm labourioù all el lec'hienn-se.

Ar chanter a dalvez adkempenn 2 savadur e-touez ar 5 a zo el lise – ar savadurioù B2 (ti-diabarzhidi dilezet) ha B3 (ti-diavaezidi /saliou dafar) – evit kenzaezañ an diabarzh anezho. Evel-se e vint adframet penn-da-benn goude ma vo bet dismantret an egerenoù diabarzh. Adwisket e vint ivez en diavaez gant ur bardaj koad. Gallout a raio ar savadurioù nevesaet-se talvezout evit meur a gefridi dreuz (kreizenn teuliaouiñ ha titouriñ, buhez skol, mererezh ar melestradur hag an arc'hant, korn evit ar c'helennerezh

hag ar gelennerien, korn dizarbenn ha yec'hed) kenkoulz hag evit ar c'helenn (korn skiantel, saliou boutinaet ha saliou urzhiataerezh, sal sonerezh).

Kempennet e vo an andrevez etre an daou savadur.



Tres al lise ha takad ma vo graet al labourioù

Ar berzhidi

Mestr an oberiadur : **Rannvro Breizh**
Mestr an oberiadur dileuriet : **SemBreizh**
Mestroniezh al labourioù : **Guillaume**
Aprioù Architectes (Plougerne - 29)

Koust

4,7 milion a € PTB,
en o zouez **3,9 milion a €** a labourioù

Deiziadur



UN ARGERZH YOULEK A-FET AN ENDR

Daoust ma sell ouzh ur glad a zo anezhañ dija, programm labourioù domani Kerampuilh a zalc'h kont eus an diorren padus da vat, ha tonket an argerzh-se da vihanaat efedoù ar savadurioù war o endro e pep mare eus o buhez ha da ginnig an doareoù gwellañ evit aezamant an dud a implij aveadurioù an domani.

Gouestlañ a ra ar Rannvro hag he leuriaded doujañ da balioù resis :

- Gwareziñ yec'hed an an dud a implij aveadurioù an domani : kalite an aer, an dour, an dafar, gwellaat degemer an dud nammet...
- Mestroniañ an energiezh : efedusted termek ar savadurioù, azasaat ar gorreadoù diouzh an ezhommoù...
- Ur merañ a-zoare : espern dour, tretañ en un doare efedusoc'h dilerc'hioù ar chanter ha re an obererezh, gwareziñ ar vevliesseurted, mererezh disheñvel eus an takadoù glas...
- Ekomerañ al lec'hienn : gwellaat korvoñ ha trezerc'hel ar savadurioù.

GWAREZIÑ AR VEVLIESEURTED, EÑ HOLL BAZENNOÙ AR CHANTER

Meur a spesad loened o deus kavet bod er c'hastell dre ma ne oa den ebet ennañ. Meur a ziarbenn gwareziñ zo bet kemet gant ar Rannvro evit chom hep noazout ouzh an annezidi-se. Evel-se e oa chomet ar braslabourioù e skourr, evit darn, e deroù ar chanter, da c'hortoz ali Ti al logod-dall e Kernas-

kledenn (56) hag evit gwareziñ div logodenn-dall gwelet en danzouar. Galvet eo bet Kevre gwareziñ al laboused, a-hend-all, evit saveteiñ teir c'haouenn yaouank kouezhet en unan eus ar siminalioù. Erfin, toull skarzhañ ar siminalioù zo bet stanket evit mirout ouzh ar c'havaned a ober o neizhioù nevez enno.



SemBreizh


ACTIVATEUR DES TERRITOIRES DE BRETAGNE

SemBreizh,
mestr al labourioù dileuriet
evit al labourioù e kastell Kerampuilh
hag el lise Diwan

*Gant Rannvro Breizh e vez boulc'het bep bloaz kalz
a chanterioù savadurioù dre ar vro, ha lod en o zouez zo
frammas-kenañ evit an obererezh
er c'horn-bro hag er rannvro.*

*Evit respont gwelloc'h d'ar redioù a-fet teknik ha
reoladoù liammet ouzh ar raktresoù sevel, modernaat
pe astenn, en em harp ar strollegezh war mailhoni ar
SemBreizh ha fiziañ a ra ennañ leviañ an oberiadennoù
e-pad ar prantad labourioù.*

*E Kerampuilh eo bet karget an oberataer da seveniñ
chanter reneveziñ ar c'hastell, en ur zoujañ d'e neuz
istorel, hag ivez da adkempenn al lise Diwan evit brasaat
anezhañ ha kinnig doareoù degemer gwelloc'h d'al liseidi
ha d'al liseadezed, hag ivez d'ar skipailhoù pedagogel,
melestradurel ha teknikel.*



Meñtroniezh al labourioù



Meñtroniezh al labourioù dileuriet



RÉGION BRETAGNE
RANNVRO BREIZH
REJION BERTÈGN

283 bali ar Jeneral Patton CS 21101 – 35 711 ROAZHON cedex 7

Pgz : 02 99 27 10 10 | twitter.com/regionbretagne | facebook.com/regionbretagne.bzh
www.bretagne.bzh

Miz Gwengolo 2021 - Empennet gant : Renerezh ar c'hehentiñ / Rannvro Breizh